

YANN VADEZOUR

Gant tri dra e vez tennet an evezh en buhez Yann Vadezour, tri dra o vont gant tri maread bras ar vuhez-se.

De gentañ, an doare m'en deus Doue hen lakset a du evit e-unan. War ar poent-se eo Yann Vadezour penn-patrom ar re a vez dibabet gant Doue da arzaf dezhañ e hentoù. Dispartiet eo bet gant Doue, santelaet en un doare dreist, peogwir eo bet arak e c'hannedigezh. Rmañ e truez en dud war ur renk dezhañ e-unan, renk izeloc'h evel just eget ar vero'hez santel hag a zo a-us d'an holl reoù all, renk disheñvel koulekaude dibuzh hini ar sent all, peogwir eo bet santelaet a-dal korf e vamm, en degouezh kevrinus an Emweladenn, pa zeuas Jezuz bev en Mari d'e santelaet, ha pa drides eñ gant awen ar Spered roet dezhañ. Eno dija e teu da wir, war ar seblant, ar pezh a lavare ar Vadezour da c'houde, diwar e benn e-unan, eo eñ " an hini a drid pa glev mouezh an Aotrou". An deiz m'en deus klevet Mari o saludiñ Elizabet, en deus tridet en korf e vamm. Hañval eo diamp ne c'helle ket chom hep tridall pa oa eno an Aotrou, pa oa un nesanded misterius etrezañ-eñ hag an Aotrou : Eñ eo an hini a zo en em viret evit ar jor da glevout mouezh ar C'hrist.

Setu perak en em ziskruez Yann evel disrannet dibuzh an holl draoù krouet, evel an hini en em vir evit ar jor dibar da selloc mouezh an Aotrou. N'eo ket bet fellet dezhañ tafva levezet all ebet; n'en deus ket klasket bezañ freelzet gant tra all ebet; n'en deus bevet nemet evit ar jor-se. Hi he deus kroget ennañ arak e c'hannedigezh, ha ne vevo goude-se nemet eviti. Evel ma lavar an Tad Faber, an oratorian

sont, e vo ennañ "un die'hallusted vantel d'en em stagañ ouzh traoù an duar". Keaset eo bet kement gent ar Spered Santel ma n'hell ket bevañ diwar tra all ebet. O vezañ mac'h anav ar gwir jon, ne c'hell staveduñ H'jon all ebet. Ha d'en dra-se end-eeun e respont an tu-se eus e vubez a zo ar gouelec'h.

Sant Lukaz en e Aviel, e lavar diwar e benn goude ~~ya~~ darvoud an Eweldadenn : "Hag ar bugel a greske hag a greñvas a spered (bepred a spered), ha chom a reas er gouelec'h betek deiz e emziskuliadur dirak Ierabel". En e vubez eta, etre al levenez kentañ ma keij gent Jezuz evit e ziarnakant e-gent e c'honedigezh, ha levenez e eil gejadenn gantañ, hini ar Vadeziant, ma " en em lacuena " Mignon ar Fried e vezañ an klev anavez an Den Nevez, ez eus ur mared a zo hini ar gouelec'h, da lavaret eo hini an emziver diouzh kement ma'eo ket Doue. Ar gouelec'h-se eo an hini mac'h adkav enni Paikari ar skiant eus Doue, an hini ma'eo Doue evel testec'h ennañ, dre na chom ken neuze hon daoulagad ken stag ouzh an traoù krouet. Ennañ, er pevare kantved, eo 'n em sanket ar re a auver Tadoc'h ar Gouelec'h, evit kaout ennañ braso'h digenvez da vezañ gent Doue hag evit bevañ ennañ ar stourm speredel ar startañ. Rak mar 'd eo ar gouelec'h al lec'h ma'emeñ Doue ar muiañ ennañ, eo'h eo ivez lec'h tentsadur Jezuz, lec'h tentsadur Anton al lec'h ma'en em zikouez taeroc'h, pell diouzh pep stourm denel, an engann speredel etre ar C'hrist ha Satan, evit pris ennañ an dud. Ar gouelec'h-se eo an hini ma'eo Yann Vadezour an em sanket ennañ, eñ ar c'hentañ, arak Jezuz, arak Anton, arak an holl reoù all en em sanket ennañ d'o ara, evit bevañ ennañ an hevelep engann speredel, en em reiñ da netra ebet nemet raganzidigezh Rouantelezh Doue gant trec'h diwelus ar garentes.

Met ned eo den ar gouelec'h nemet 7 vezañ den al levezeg speredel. E Kenbedenn Gouel sant Yann Vadezour, e c'houllemer digantañ gras ar Joe speredel : honnezh eo end-eeun e c'hrae personel. Eñ a zo ar sent drantañ eus ar Skritur. Nemet ez eo den ur Joe nemetken, a zo ar Joe de glevout Krouezh an Aotrou. En em dennañ a ra d'ar gouelec'h evit ne vo netra ken ouz e zistreiñ diouz ar Joe-se, evit en em reiñ dezhi a-bezh, evit kaout eñj bepred eus ar gejadenn-se a-ziarok e c'hannedigezh na gortoz an eil gejadenn, hini ar Vadezient.

Iezh a zo spezhus en Yann Vadezour, eo kement-se, ez eus ennañ, war un dro, ar spered bras-se e binijenn, hag an drantiz diabarzh-se, ar brasañ Joe hag ar brasañ pinijenn a-gevret. Ul liamm a zo, evit gwir, etre ar brasañ pinijenn hag ar Joe brasañ. N'eus ket braso'h levezeg eget hini Prenez Asis, hini Yann ar Groez, hini person Ars, hini Tadrou gouelec'h an Ejipt, ar gouelec'h a binijenn na vleugn ennañ Paradoz al levezeg.

+

Evel m'en deus Yann diaraoger ar C'hrist arak e c'hannedigezh, eo ivez diaraoger e vuhez poblek. Sed ennañ goude ar gouelec'h, barr uhelañ e vuhez, ar c'houlz na kempenn Hentou ar C'hrist : "Un den a voe kaset gent Doue a oa Yann e eno. Dont a reas evel test, evit reiñ testeni d'ar Sklerijenn, evit na kredfe an holl drezañ. Ne oa ket eñ ar Sklerijenn, met eñ a oa evit reiñ testeni d'ar Sklerijenn". Yann Vadezour a zo dre natur an hini a zo testeni d'ar Sklerijenn, an hini a ziskoueze Jezuz. Roll uhel-dreist eo e hini en labour arak donedigezh hag oberenn ar C'hrist. Eñ eo an hini a brient vuhez prezeg ar Salver, a stumm an enepù da resev e geledadurioù. O c'henteliañ a ra evit 7 "divrezañ", evit digeriñ enno un hent da Gouz an Aotrou. Re

grediñ e vefe bet ar gouz-se evit ennoù digemprenn. Ret mat eo dezho en
 arak ur stummidigezh beznak. Ret mat eo distreiñ e soñjoù diouzh e
 boazioù douarel, hag atizañ enno evezh ha nec'hamant.

Hennezh eo roll ar Badezour. E-kichen an dud-se disañj eus traoù Doue
 eñ eo an hini a zihun enno ar prederi, a zirenk anezho diwar e stabilde
 hag a lak da sevel en e c'halon ar youl-vat kentañ-se a c'hellint ganti
 goude-se kompren ar C'hrist e-unan.

Mont a rait war rak e-touez tud e amzer a zo evel tud hon amzer-ni,
 prederiet, hervez ma lavar Sant Lukaz en un arroud sebezus, " ar
 soudarded da heskinañ ha da fletreñ, ar publikaned da c'houlenn muioc'h
 eget ar pezh 'zo dileet dezho" (3.11-14). Evelse 'mañ an dud, evelse an
 dud neuze, evelse an dud e vremañ ! Prederiet holl gent e gont
 douarel ! Disañj a-grenn eus Doue ; ha pa dremenomp en e zouez, pezh a
 sentomp e sevel ennomp eo an enkrez dirak diseblanted divent ar Vreiz.

Evit hejañ an dud diwar e digasted eo ret Profeted, da lavarout eo
 tud a vefe kemeret holl e spered gent dre Doue da welout an traoù, tu
 evit tennañ ar re all eus e laokentez, ha bezañ testoù da vat. Bezañ
 test eo da gentañ bezañ gwelet an traoù en e spered, bezañ bet degaset
 gent Doue e-barzh ar weladurezh-se eus ar bed a zo e hini, evit gallout
 goude-se lakaat ar sklerijenn-se da dremen er re all. Evelse eus Yann
 Vadezour. Doue en deus e lakaet da vont e-barzh kevrin e vennad, en
 mister e ratozhoù, e dennet en deus er gouelec'h evit e unanig ganti
 levenez ! Ha bremañ, ha kement-se eo ar penañ, eñ a zo an Test, an
 hini a ziskouez ar C'hrist d'an dud .

Talvoudus eo gwelet a dost an arroudenn eus Iezhia en em harp war
 Yann-Vadezour en e brezegerezh : "Frealzit, frealzit va fobl, eme he
 Toue. Komzit ruzh kalon Jeruzalem, ha youc'hit dezhi ez eo echu he

sklavelezh, ez eo die'haouet he draouiezh, hag he deus bet digant darn an Aotrou, daougement all evit he fuzha fec'hedoù. Ur vouezh a gri : Kempennit er gouelec'h hent Yaweh, plaenait er stepenn un hent evit hen Doue ! Pep dronienn da vezo uhelaet, pep aenez ha torgenn da vezo izelaet, an taeannoù da vezo plaenennoù hag ar rec'hier serzh ~~XXXXXXXXXX~~ kempennnoù ! Ha neuze en em ziskouez klod Yaweh, hag an holl grouadurioù hen gwelo gwitibunen, rak gant Yaweh en deus kempennet !"

Pezh a zo keoz snezhañ eo eta emziskouezidigezh klod Yaweh, hag edev an holl grouadurioù. Sed ar pezh a vez kempennet gant Yann, pa c'houlenn digant an eneoù en em abzañ gant ar binijenn, sed ar pezh a zo war nee nes dont gant deroù an Aviel. Ha setu perak ez eus emañ ur seurt taeroni ha nerzh e-keñver kement a zo en e rak en Testamant kozh. Bremañ emañ tost keur an darvoud : klod Doue a ya d'en em ziskouez ; an dud a ya d'en em gant dirak klod Doue. N'eo ken neuze ar c'houlz da goll amzer, da vont a gleiz hag a zehoù; sed ar c'houlz d'en em atumañ evit an donedigezh-se gant ar binijenn.

Kement-mañ a vez diskleriet nerzhus-kennañ gant Yann, pa gomp ouzh ar Parizianed : "Gouenn naered, piw en deus desket d'eo'h tec'hout rak ar gannar eus an nec'h ?".... Dija emañ ar vroc'hel ouzh gwirizenn ar wezenn .. Kement gwezenn na zoug ket frouezh mat a vo troc'hed ha stlepet en tan. Ne ho padez en dour evit ar binijenn, mat an hini a zeu war va lerc'h a zo galloudusoc'h egedon. Eñ ho padezo er Spered Santel hag en tan". Ar Spered Santel hag an tan a zo eskatologiek ar ster auezho. An Tan-se eo Tan ar Varn, ha war un dro Tan ar Garantez. Klod Doue eo an hini a zo war-nes treuzneuziañ ar re reizh hag ivez ar c'hontrol war nes pulluc'hañ ar pec'hed. Ned eo Badesiant-dour Yann Vadezour nemet ur skouderm eus an dra-se hag un aradur dezhañ. An Tan hag ar Spered hag a ya d'en em ziskouez, a ya ivez en gwirionez da gas

de benn en dreuzneuziâdur-se , an treusfurmidigezh-se eus ar bed eo deuet ar C'hrist d'hen seveniñ.

Evel-se Yann Vadezour eo an hini a gemenn donedigezh ar Roue hag ar Berner, "parouzia" ar C'hrist klodus ; ha war un dro ez eo an hini a embann donedigezh ar Pried . Ar Pried eo unan eus anezhañ " an Hini a dle dont".-Hag an hini a dle dont eo an Aotrou a glod a warno ar re vev hag ar re varo, ekeit maz eo ivez ar Pried a deus komzet anezhañ Kanenn ar C'henebenn hag ar Brofeted, a zeu da gaout an denelezh en deus dibabet evit en em unaniñ ganti en ur c'horf hepken a vo e gorf, en doare d'he lakast da antren ebarzh Ti e Dad.

Hag eñ n'eo ken ur c'halvadenn d'an aon ha d'ar binienn dirak tan deus Doue, met ur c'halvadenn labuen d'al levenez, rak deuet eo ar c'houlz ken gortozet evit eured an Denelezh a ya da vezañ dimezet en gwirionez gant Verb Doue. He Yann a zo eñ mignon ar Pried, da lavarout eo an hini a zegas d'ar Pried, evel en euredoù a-ziagent, e gefrisa. Anavezout a rit an destenn : "Me 'non ket ar C'hrist, met degaset ou bet en e rack. An hini a zo gantañ ar wreg yaouank eo ar pried; met mignon ar pried, p'emañ aze a selabu anezhañ, a gav levenez gant muezh ar pried. Hag al levenez-se em eus-me en he leunder. Dezañ eo da greskiñ he din da vihanaat". Sed aze ar gomz a zigor diap donderiñ brasañ eus Yann Vadezour : Eñ eo an hini en deus levenez leun-barr gant muezh ar Pried. Klevet en deus eñ ar vuezh-se n'en devoa ket Abrah'ham klevet anezhi, n'en devoa ket Moizez klevet anezhi, n'en devoa ket David klevet anezhi ! Yann Vadezour eñ en deus klevet. Eñ a zo an hini en deus bleniet an Denelezh da gaout he fried.

Setu perak ez eus en dremm Yann Vadezour, e kichen ar brasañ taeroni an dooster ar brasañ. Eñ a zo den ar brasañ taeroni, dre maz eo an hini en deus santet Santelezh Doue, ha gant-se an hini en deus brasañ

skiant eus ar pec'hed hag eus ar binijenn ; eñ a zo den ar bresañ puridigezh. Met war un dro, eo den al levezeg hag an doester bresañ ! Evit gwir n'eus netra tostoc'h en eil d'egile ; eo buhez ar gevrinourier vras netra tostoc'h d'an dimezi speredel ha da varr uhelañ en unvaniezh eget ar puridigezhioù an doanusañ hag an treantuseñ. D'ar c'houlz ma teu ar Verb d'en em unaniñ gant an Denelezh, eo ret da honneñ santout donoc'h eget biskozh, pegement he deus erbonn da vezañ pureet gant an Ten, ma kompreno ez eo gant Tan ar Spered hepken e vo lakaet dellezek eus an dimezi !

Ha Yann en deus ar joa da welout e destent klevet, da lavaret eo e ziskibion - ar re a zo bet da gentañ e ziskibion - oc'h anavout Jezuz. Kempennet en deus an hentoù, ha setu bremañ Yann, Pêr, Jakez, e ziskibion atzet gantañ, oc'h en em stagañ ouzh Jezuz pa dremen. E ziskouez a ra evel Oen Doue. Ha kement-se a zo holl levezeg Yann Vadezour : ar joa da welout ar wreg nevez a kaout preñd. N'en deus ken c'hoantadenn.

+

Evelse en deus Doue atzet Yann, ha lakaet anezhañ da vont e-barzh e sekredoù, goude bezañ diarannet diouzh traoù ar bed. Evelse eo bet ar Vadezour ar benveg en deus stummet en enepù a-~~uzh~~ benn donedigezh ar C'hrist. Ha war lero'h kement-se - met emañ eo ez eus un dra ken misterius ha ken fromus en e vuhez-, goude bezañ servijet, eo'h adkouezh en deñvalijenn. Distolet eo, mont a ra diwar wel, steuziañ a ra kuit ! Ur wech ar C'hrist aze, n'en deus ken d'ober nemet mont da get. "Dezhañ eo da greakiñ ha din da vihanaet". Diwezhañ e vuhez en em ziskouez eta evel un dilezidigezh, un dienez, un emziouer klok. Goude bezañ kavet perzh en mister prezegerezh ar C'hrist, e kav perzh en mister e Basion. Peguy eo an hini en deus merzet, diwar benn Janed Ark, eo bet honnezh

ur skeudenn leun eus Jezuz-Krist, dre m'he deus hi echuet ivez he buhez en droukverzh, en akounac'h, distaolet, dilezet. Keur a sant en deus o'hoantaet echuiñ evel-henn goude bezañ servijet !

Ket kement-mañ, en Yann Vadezour, a zo evit gwir misterius ha frouus kenañ. Gwelout a reer da gentañ pegen dilezet eo gant e re. E ziskibion ne gavout ken ennañ o dudi. Enn 'mañ Jezuz, Yann Vadezour ned eo mui netra. Bet eo bet profed bras, o sachañ ur maread tud war ribloñ ar Yordan ha n'eus ken den evit e heulisañ. E holl ziskibion a zo en em staget ouzh Jezuz peogwir eo ouzh Jezuz e oa d'en em stagañ. Asantiñ a ra da vezañ dilezet evel-se ; eus a bell e sell ouzh an diskibion a zo gant Jezuz. N'en deus ket zoken ar jor da vezañ en o zouez o vezañ gant Jezuz. N'en deus ket zoken an dra-se. Al levenez-se, he lezel a ra da reoù all. Kaset en deus e gefridi da benn, ha netra ken. Kohu eo e labour. Bevañ 're kuzh adarre .

Ouzhpenn bezañ dilezet gant ar re all, e seblant ivez bezañ dilezet gent Doue - ha kement-mañ a sell ouzh doareoù misteriusañ fin e vuhez - un tammig evel m'eo bet hon Salver war ar Groaz. En darvoud kevrinus-se ma kem e ziskibion da gavout Jezuz, da o'houlenn outañ deoust hag eo en evit gwir an Hini a dle dont, e seblant bezañ ennañ, d'ar o'houlz-se, evel un deñvalijenn, a zo ar burldigezh diwezhañ a ra Doue ganti evit e regezañ hag e unaniñ muioc'h e'hozh outañ, teñvalijenn ma ne wel ken sklaer gant e boell-den, ma tle chom hepmuiken en ur vuhez speredel glan hell ha diskezell e-greun, mac'h anav end-seun an amrouennoù bras-se eus ar feiz, e lak Doue da dremen drezo e vignoned wellañ, evit ma ve da vat amrouet o feiz.

Erfin e ra Yann Vadezour ar pezh a zo an uhelañ testiñ a garantez : anavout a ra ar prizon hag ar maro, evit bezañ rentet ivez testiñ d'ar

Wirionez betek an diwezh. Taplet eo en toull bac'h, dilezet,
ankoumao'haet, dibennet : reiñ a ra betek e vuhez hec'h unan. Etre an
diw noz-se, noz ar gouelec'h er penn kentañ, noz ar prison er penn
diwezhañ, ez eus un dra misterius neurbet, ar c'houlz berr-se maz eo
an diougner bras o kemenn donedigezh monezh an Aotrou, ar c'houlzed
ma' n en ziskouez ened eo e leunder an doare dibar eo e hini, bezañ
hepken monezh an hini a gri er gouelec'h : evel pe vije kreizennet ha
stardet e vuhez a-bezh en dra d'ar poent-se maz eo eñ ar vuhez a
ziskouez Jezuz, evel pe vije ar peurrest gortozidigezh ha tefvalijenn.

+

Yann Vadezour eo an hini en deus ragarzet hentoù an Aotrou, ha
gantae eo penn-patrom an holl re o ar galvet d'un hevelep kefridi.
Met ar gerg-se emañ Yann o kenderc'hel d'he seveniñ en Iliz. E roll
n'eo ket hepken ragarzañ donedigezh ar C'hrist en ur pred eus an
iator ; e roll a zo ragarzañ holl donedigezhioù an Aotrou. Kerzhet
en deus dirak Jezuz a-zisraog e c'hanedigezh ; kerzhet en deus diraket
en e vuhez ; evel m'en deus merzet Origenes, en deus kerzhet diraket
en e Rouantelezh ar re varo ; kement-mañ evit gwir a zo ur menez
kaer-kenañ : arak d'ar C'hrist diskenn da Rouantelezh an Anan evit
o dieubiñ, eo diskennet Yann en e rak er bed-se ma chome an Anan
prizonidi an Anek. Evelse c'hoazh d'an deiz diwezhañ, e teuas dirak
ar C'hrist, ene Tadou an Iliz, e kemmae donedigezh diwezhañ an Aotrou
evit barn ar re vev hag ar re varo. Yann eo harad an holl
Berrouzennou.

Evelse eo Yann Vadezour ragarzer donedigezhioù dizehan ar C'hrist
en ened hag er poble. Mar il eo bepred Jezuz "an Hini a zeu", mar 'd

eo istor an Iliz adal e Bignidigezh betek ar Varn, istor e Erouzenn e bed kuzh ar c'helenn, eo Yann ivez an hini a gerzh bepred en e rack . Pezh a zo gwir evit engorfidigezh ar C'hrist en ur pred eus an istor a gendalc'h da vezañ gwir evit stumidigezh e gorf kevrinus. Evel ma teu bremañ pep gras dre Vari, o vezañ n'hell ket hi bezañ bet mamm da Jezuz, hep bezañ ivez an hini a c'han bepred e gorf kevrinus, evelse e vez regezet gant Yann Vadezour pep distro da Zoue. Sed eze kelennadurezh an Tadoù : "Soñjal a ran, a skriv Origenes, emañ mister Yann o kenderc'hel bepred da vezañ sevenet ar bed. Nep piw bennak a dle krediñ er C'hrist Jezuz, eo ret dezhañ ma teufe a-ziarek en e ene spered ha vertuz Yann da vezañ d'an Aotrou e hentoù, da gompesañ skiselloù ar galon, da zigrommañ ar gwenodennoù. Betek hiziv emañ spered ha vertuz Yann o tent en arack da zonedigezh an Aotrou Salver" (Homelienn. Luk. 4)

Reogwir eo donedigezh ar C'hrist tra diersav - emañ bepred o tent er bed hag an Iliz - ez eus un Azvent diersav eus ar C'hrist ; hag an Azvent-se a zo leun eus Yann Vadezour. Gras Yann a zo regezañ ar pezh e zo war nes dont. E gefridi personel eo bezañ eze evit kempenn ar bleunadurioù speredel bras, an diunadurioù bras ar broioù mision. Eñ eo an hini a hast donedigezh ar C'hrist dre lakast da dregerniñ ar galv ken gulloudus-se d'ar binijenn, d'an 8 emzistro, en doare ma c'helle ar C'hrist dont. Hag hañval eo din eo taeroc'h ar c'halvadenn en hon amzer ma hañval donedigezh ar C'hrist bezañ war-nes-kaer evit hiniennoù eus broioù bras ar bed.

Troet ha diverret gant Maodez Glanndour
diwar Yann Danieloù "Le Mystère
de l'Avent".

SKEUDENN AR BED

Skeudenn ar bed a anavan
D'an nep a sell, tri zra warni.

Hag ar c'hentañ eo te Jezuz
Gourvezet marv en douar pri.

An eil tra eo da vamm dener,
Laket er bez, Santez Mari.

'Vit an trede, ur gwele trist,
Warnañ ur gorf maro, divi.

Kelan va Zad, Kelan un all,
N'ouzon, n'eus forzh, pe va hini.

Met 'us dezho, ~~da zremm~~ da zremm, Jezuz,
Da gorf nerzhus o tasorc'hiñ.

Ha korf Mari, neved santel,
Douget d'an neñv, er veuleudi.

Dirak ar gwele, ur piled,
Goulou a c'hoanag o pãdiñ.

Un tu d'ar bed, un tu a boan,
An droug, ar marv, hag ar fazi.

Met ar Vuhez war an tu all,
Doue da viken o trec'hiñ.

ooooo

LENNADURIOU e-PAD AMZERVEZH AN AZVENT

DIUGANER AN TAN

E keit ma oa Jezuz, e Nazared, oc'h ober gant ar vouc'hal hag ar skouer, e save eus ar gouelec'h ur vouezh, war-du ar Yorden hag ar Mor ma.

An hini diwezhañ eus ar Brofeted, Yann ar Vadezour, a o'halve ar Yuzevion d'ar binijenn, a gemenne donedigezh reuantelezh an neñv, a ziugane ar Mesias war nes ha tost, a skandale ar bec'herion a zeus devetañ, hag a spluje snezho en dourioù ar stêr, ma vefe gwelc'hadur ar c'horfoù evel penn-kentañ puridigezh an eneoù.

Er maread herioùdek-se trubuilhet, ar Judea kozh, bet gwallet gant an alouberion edomet, kontammet gant ensiladur an Helleneged, gwasket gant soudarded Roma, hep roue ken, hep unander, hep glaz, stlabezet hag hanter dastrewet he zud a bep tu, gwerzhet gant he beleion c-unan, a vez e leñvañ bepred d'he galloud douarel kollet abate mil bloaz, oc'h esperiñ gant kilpennegezh ne digoll bras, un dasroc'h burzhudus, un distroy eus an trec'h, gonid bras he Doue, donedigezh ur Salver sekret gant an olev, merket dezhañ ren war ur Jeruzalem nevez kreñvoc'h eget hini, Salomon mestroniañ eus Jeruzalem war an holl vroadoù, kabestrñ ar brissed, s'jeñ an impalaeriezhoù, he reiñ an evurusted d'e bobl he d'an holl dud, - emañ ar Judea gozh displijet gant he mistri, gant he skribed skraperion arc'hant, gant he farizioned devot, preizhataet gant ar bublikaned, disrannet, izelaet, lakaet en arigrap, emañ hi en desped da bep meshegezh, leun a feiz en da-zont, e reiñ a galon vat he skouarn da glevout ar vouezh a zeu eus ar gouelec'h, emañ e teredek da ribloù ar stêr.

Graet mat eo doare Yann diouzh hoalañ ar faltazi. Mab ar gzhni hag ar burzhud, eñ a zo bet merket adal ar c'havell da vezañ Nazir, da lavarout eo : dinann. Biskoazh n'en deus touzet e vlev, biskoazh n'en deus evet gwin na died mezvus, biskoazh n'eo aet war-du ur plac'h, biskoazh n'en deus anavezet karantez ebet estr eget hini Doue.

Yaouank c'hoazh en devoa kuitaet e dad hag e vamm. Kuzhet er guelec'h en devoa bevet ennañ e-pad bloavezhioù, e-unan-penn, hep ti na teltenn, hep servijer, na natra dezhañ nemet e zilhad. Gwisket en ur c'hrac'hon kañval, starded endro d'e zargreiz gant ur gouriz lér, bras, askornek, krazet ha sulihet gant an heol, blevek e vrennid, e vlev war e ziskoaz, e varo digempenn, e taole eus a zindan e ziwabrant strouezek, selladennoù karget a foeltr e keit ma tarzhe en e c'hennù, milligadurioù ...

..... Dêvet e gorf ouzh heol ar guelec'h, dêvet e ene gant c'hoan ar Kouantelezh, Yann a zo kemener an tan. Gwelout a ra er kesias e tout, mestr ar Flame. Ur c'houeried didruet ha gary a vo ar roue nevez : kement gwizenn ha ne roio ket frouezh mat a vo trao'het ha skoet en tan ; gwentet e vo an ed war al leur, ha dêvet ar plouz hag ar pell en un tan divarvus. Eñ a vo en hini a vedezo gant an tan/

Keut, konnerek, gary, dreinek, busnek ha prim da gounjennid, ne ro ket Yann flouredoù d'ar re a dosta outañ, daoust ma c'hellfe tennañ gloer a vezañ e sachet betek ennañ. Ha pa zeu d'ar vedeziant, Parizhned ha Sedukeidi, pennañ bras, tud empart/war ar Skritur, brudet ha selaouet, e ra vezh dezho muioc'h eget d'ar re all :

"Gouenn naered, piw en deus sliet so'hanoc'h da dec'hout dirak ar gonner o tout ? Grit eta frevezhioù mat a binijenn, ha n'it ket da lavarout enno'h hoc'h-unan : Abrac'ham hon eus da dad ; rak hel lavarout a ran deoc'h e c'hell Doue lakat da sevel eus ar mein-mañ bugale da Abrac'ham".

C'hwi hag en em guzh en ho tlezh-mañ evel naered d'indan ar rec'hier, c'hwi Farizianed ha Sadukeidi, c'hwi 'zo kaletoc'h eget ar maen ; gant lizherenn al Lozenn hag al lidoù eo bet troet ho spered da vezañ maen ; troet ho kalon emgar da vezañ maen ; d'an den naoniek a c'houlenne bara hoc'h eus roet ur maen, hag e skolt ar mein ouzh kement hini en deus pec'het hebeutoc'h egedoc'h ; c'hwi a zo delwennoù maen lorc'hus a c'hell an tan hepken trec'hif warno, rak warno ne ra an dour nemet ruilhal ha disec'hañ divugtu. Met an Doue-se hag en deus m'oret an dour d'ober Adam, a c'hell gant bili an aod, gant mein an hent, gant rec'hier ar menez ober tud bev arall, mibion dezhañ ; kemm a ray ar greunvaen en kig hag ene, endra m'hoc'h eus treuzfurmet en greunvaen ene ha kig. Hebet kaer eo dour ar Jordan. Ur penn-kentañ hepken eo ar gwelo'hadur : kemmit ho puhez, grit ar c'hontrol bev eus ar pezh hoc'h eus graet betek-henn, pe pulluc'het e vlot gant an Hini a vadezo gant an tan".

Giovanni PAPINI : Istor ar C'hrist.

ROLL PEURBADUS SANT YANN VADEZOUR

Pennas e c'hell sant Yann, en ugentvet kantved-mañ, kenderc'hel d'ober en hontvez gant ar roll a zo bet e hini e-keñver ar Yuzevion en amzer en Enkorfidigezh ? Pennas e c'hellfe bremañ c'hoañh hon skolasellañ en un doare efedus d'en em arzañ evit distro klodus ar C'hrist ha donedigezh peurbad e rouantelezh ? Da gentañ, gant e gellennadurezh, a zo seul vrasoc'h he nerzh hag he zalvoudigezh ma'n em gev bremañ e-barzh an Aviel. N'eus netra a vefe muioc'h a vremañ eget prezegerezh Sant Yann, netra a vefe muioc'h dibuzh spered an Azvent. Petra eo ar pezh e kompz dizehan an diaraoger diwar e benn, nemet donedigezh tost rouantelezh Doue ? Hag evit ma vimp pare e-benn an degouezh-se, e kemenn dimp sant Yann, n'eus forzh behini a vefe hon derez er gevredigezh, ober gant izelegezh ha lealded dirak Doue, gant justis ha trugarez en hon darempredoù gant hon nesañ. Aes eo gwelout ez eo a-grenn dibuzh hor c'houlz ar c'huzulioù-se a ro Yann d'ar re holl e fell dezho tremen dre e vadeziant a binijenn : Parizianed, Publikaned, studered. Rak sed amañ lavarenn-diazev e brezegerezh : "Grit pigijenn". Met ar binijenn gouennet gant an Diaraoger, hervez ar ger gresiek implijet gant an avielerion, a zo metanias, kemmadenn ar spered hag ar galon, emzistro leun ha don'an ene o'n em reiñ a-grenn da Doue, antredigezh en ur vuhez nevez stummet war an Aviel.

Evelato ne c'hell ket hor vuhez bezañ kemmet gwirion hep distro d'ar C'hrist e-unan. Ret eo da gentañ ma vo anavezet an Hini a zo denvez hor feiz. Rak gwir eo bepred al lavar a ro dimp an Diaraoger da glevout en trede Sul an Azvent : "En ho touez ez eus unan n'anavezit ket" (Yann 1, 26). Met n'anavezer ket ar C'hrist gant ar reiz hepken a-dreuz tezennoù levrioù. Ne c'hell ar Salver bezañ evidomp ur beronelezh gwirion ha bev nemet mar strivomp hep skuizhañ d'en em stagañ outañ a galon gant holl bouez hor beronelezh-ni. Kement-mañ a c'houlenn un ene stegnet bepred war-du ar Salver, ha preder dizehan da gommisañ da vuhez ha da bedenn an Iliz el liderezh. Evit lakaat da vont war hent ar binijenn ar re a zeve davetañ ne rae Yann nemet diskouez ar C'hrist gant e viz, en ur lavarout hepken : "Setu Oan Doue" Da Yann eta, d'an Diaraoger, da vignon ar Fried, eo e tleomp gouenn an zalvoudigezh d'oc'h ha surc'h eus ar C'hrist hag eus e visterioù. Dezañ eo d'hon lakaat da antren e gwirionezhioù ar feiz, ha da zizoleiñ o splanderiezh a-hed bloavezhied al lidoù. Mar'd eo ar C'hrist sklerijenn ar bed, eo da Yann, dreastholl e kreiz ar ~~sklerijenn~~ marevezh mañ a fazi hag a zizonestiz, da reiñ testeni d'e sklerijenn : Ne'er ket eñ a oar sklerijenn, met deuet e oa evit reiñ testeni d'ar Sklerijenn" (Yann 1, 7).

Yann a zo e gwirionez Sant an Azvent, sant pep Azvent. Warnañ eo e lak an Iliz ar preder d'hon arzañ ha d'hon bleniasñ en erbenn d'ar C'hrist. Met evel n'eus ket da vevennañ strizh gant sizunioù berr an Azvent arzidigezh hon ene da donedigezh ar Salver, evel ned eo an Azvent nemet an digoradur da vloavezh al lidoù a tleomp gantañ kenderc'hel bepred da glask an otron, e rank Yann kenderc'hel ivez da gabut levezon war hon vuhez kristen penn da benn.

Elision Sant Yann a chom en hevelep hini er c'hantvedoù hag a chom betek distro klodus ar Salver. Rak Yann a zo evel m'en deus lavaret an otron e-unan, en Elis nevez, eñ a zo da holl viken an Diaraoger.

Ha bemdez en Ofis ar Meuleudiñ, en Iliz oc'h adkenañ kantik Zakaria, a lavar endro an diougan a savé Zakaria diwar e benn : Kerzhout a ri en areok d'an Aotrou evit arzañ dezhañ e hentoù. Ar roll rakdivizet gant Doue evit e sent ne o'hellfe pauez gent o buhez douarel. N'eus den a gredfe soñjal he deus ar Verc'hez Vari echuet gant he roll a vamm, adal an deiz m'he deus kuitset an duar evit pignat d'an nenvoù ? Diaranger ar C'hrist en e o'henedigezh, Diaranger en e vuhez-prezeg, Diaranger en e varo, sant Yann a zalc'h da gerzhout en areok d'an Aotrou. Ha muioc'h eget na soñjomp mpervat, emañ en un doare kevrinus oc'h efediñ warnomp en hor buhez a-vremañ, en deiz-mañ-deiz. (1)

Hervez Dom Flicoteaux,

e Fêtes de Gloire : Avent, Noël,
Epiphanie, Bannad 3 :

"An Hini a raga'z hentoù an Aotrou".

(1) Sell. ouzh Sant Ambrosius : Displegadur war Aviel sant Lukas, pennad 1, niv. 38 (P.L. levrenn 15, bann 1549).

BARHONEGOU KABIR

Pa vezan diarannet diouzh va muiad-karet e vez va c'helou leun
a dristidigezh. N'em bez diskiuzh e-pad an deiz ; n'em bez kousked
e-pad an noz.

Tefvel an noz : an eurioù a dremen hep na zeufe endro. Kridienni
ha krenad a ran gant an son, pe n'emañ ket eze va Aotrou.

Selacu, va mignonez ! eme Kabir, n'eus jos ebet nemet kejañ gant
ar muiad-karet .

+

O den, mar n'anavezez ket da Aotrou-te, sus petra tennañ lore'h ?

Diannav pep empartiz : n'eo ket gerioù hepken az unanù outañ .

Ha vez ket toulliet gant testeni an tresh skrivet.

Disheñvel eo ar gerantez diouzh ar gerioù, disheñvel-kaer, hag
an nep a glask snezhañ ez-leel en deus endeo e gavet.

+

Perak ez out ken dibabek, va c'helou ?

An hini a veilh war an evned, al loened, an amprevaned,

An hini en deus kemeret preder gant pe oas c'hoazh en korf da

vann,

Douet ha n'ez tivello ket bremañ maz out eet er-maez snezhañ ?

O va c'helou, penaos e c'hellez er en zistreiñ diouzh mousc'hoarz

Doue ha kantren keit-all dioutañ ?

Dilezet eo'h eus da Gariad evit soñjal en reoù-all. Setu perak
e vez goull da oberoù.

+

E-touez an holl deizioù eo ker din an deiz-mañ, rak hizio eo
deuet va Aotrou muiad-karet da vezañ betiziad va zi.

Va c'hanbr ha va c'helou a splenn gant e vezañs.

Va c'hanterontent a gan e ana hag en en goll en e gaerded
divent.

Gwelo'hiñ a ran va areid ; arvestiñ a ran ouzh e zremm, hag e
stouan dirazañ, a teges dezhoñ da brof, va c'horf, va ene ha kement
a zo dit.

Rebezh deiziad a jos, emañ ma teu va muisñ-karet, va holl
binvidigezh, da chom en zi.

Pop drouksoñj a nij kuit eus va c'hreiz pa 'sawelen va Gwirion.

"Gutañ he deus atoket va c'harantes . Hiraeziñ a ra va c'halon
etrezek e ana a zo Gwirionez" . Evelae e ken Kabir, servijer e
holl servijerion.